

— Recteur M. G^el Morvan, plus tard
 Rédacteur du Feiz ha Breiz + buez ar Feiz etc
 Sur la Mission de 1869 etc Compte rendu
 dans Feiz ha Breiz 1869 p. 147 etc —

CANTIC

Great evit ar Mission a oue roët e parrez Pluguën
 er bloaz 1786, ha moulllet a nevez evit an hini
 a zo bet roët er barrez-se er bloaz 1869. (9 mae —

1

— Allas ! allas ! hon Tadou ker,
 Setu eta tost an amzer
 Mac'h achuo ar Mission ;
 Pebez glac'har 'vit hor c'halon !

2

Goude ar boan oc'h euz lakeet
 Da ober brezel d'ar pec'het ;
 E teuit brema d'hor c'huitaat,
 Houma zo deompni calounat !

3

Hon cne brema zo neteet,
 Lamet divarnhan ar pec'het ;
 Mes allas ! bea on euz aon braz
 Na zeuffemp d'her c'hommetti c'hoaz !

4

Tadou Santel, kent kimiada,
 Lezit ganeomp da viana

Eur sin bennac en hor c'hanton
Euz a c'hrasou ar Mission.

5

P'oc'h euz kement a boan lakeet
Var ho corf ha var ho speret
Evit discouez deomp hent an Ee
Ila pidi evidomp hon Doue.

6

Ah ! confessorer benniget,
P'eur e c'hellimpni ho cuelet ?
Ha ni or bezo biken ar c'hras
Da velet hon Tadou ker c'hoaz ?

7

Pa oc'h euz bet ar garante
Da zillamma hon ene,
Lezit ganeomp eur merk bennac
Euz a c'hrasou Jesus hon Tad.

8

— Ma bugale, pe sort boket
A c'houlennet 'vit ho Retret ?
Dre ho pec'hejou ker garo
'Poa lakeet Jesus d'ar maro.

9

Evelse rezonapla tra
A gavompni kent kimiada,
Eo he lakat deoc'h ouz ar groaz,
Ma chomoc'h ato en he c'hras.

10

Ia, oll dud ar Mission,
 Setu, ama an donezon.
 'Lezomp ganeoc'h kent kimiada,
 Lakeet oc'h oll fisians enna.

11

Setu ar Mestr Missioner,
 Setu Jesus-Krist ho Salver,
 Digor evidoc'h he galon,
 Deut oll d'he glevet o sarmon.

12

Ouz ar groaz hirio benniget
 Ha tost d'ar vourc'h nevez savet,
 Ema boket ar Mission :
 Deut d'he adori a galon.

13

Ne d'it morse ebiou ama
 Eb lavaret da viana :
 Me ho salud, Salver ar bed,
 A zo ouz ar groaz-se staget.

14

Tud paour, tud clany, tud mac'haniet,
 Tud glac'haret, tud ankenniet,
 Deut da gaout croaz ar Mission,
 Hag o pezo consolation.

15

Intanvezet, emzivadet,
 Tud gant goal brocezoù nec'het,

Kemerit Jesus d'alvocat
Hag o pezo sicour timal.

16

Ma breudeur ha ma c'hoarezet,
Kement a zo bet er Retret,
O pezet sonch en ho calon
Euz oll Dadou ar Mission.

17

Ha pa vezimp-ni en ilis
Oc'h offr da Zoue 'r sacrifis,
Ni bedo evidoc'h ive
Ma'z aimp oll da velet Done.

18

Douget imach ar Grucifi
Da henori ar pemp gouli ;
Setu hor souhet deiz ha noz :
Kenavezo er baradoz !

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 1^{er} mai 1869.

EVARD,

Vicaire général.